

(384, suite)

An innocanç anavezet,
 Pe delivranç Person Val-Sant-Viçant, accuset faussamant
 da veza assassinet Benead Redon, adjoent ar mear.

Var ton : Gwerz an Autrou Homo.

Pobl mad eus a Vreiz-Izel, selaouit, me ho ped,
 Penos ar speret a zo arichou farjiet :
 Credit ferm ne zeus nemet hon Autrou Souveren
 A bini ar jujamant na farzi birvigen.

An autrou Marcellin voa Person Val-Sant-Viçant,
 Un den eus an honesta, devot bras ha prudent ;
 Na sonjas get sur biscoas e teujet d'en tamal,
 Na d'en accusi bigen eus a netra a fall.

(385)

Gouezit ervad, christenien, e zo un dra impi
 Implich, en nep seurt feçon, an infam calomni :
 Mar trompler re alies tud savant eus ar bed,
 Bezomp certen birvigen Doue na vo tromplet.

Neo get avoalc'h, gant comzou, seblanti vertuzus ;
 Ret eo demp, e peb amzer, beza mad, generus,
 Mar bezomp calomniet, lacomp hon esperanç
 En Doue a vadelez ; en vo hon recompanç.

Ar Person en doa choazet vit e vrasa mignon
 Qenta adjoent eus ar mër, leal vel eur Breton.
 E ty Redon e vije ar Person alies,
 Hac an teodou milliquet a zonch fallagries.

Lavaret a rêt en cuz e yê in autrou Person,
 Var digare cozeal, da velet greg Redon ;
 Mes ar pastor vertuzus n'en devoa nep souci
 Deus an teodou aër-viber, daoust d'o oll galomni.

O veza êt da zicour da laza un tam-goall,

E pelec'h e labourer gant nevez dreist-ordinal,
 Eun treust a deu da dervi hac e coez d'an douar,
 Mil boan en doe o sevel, dijsentret voa e c'har.

Ma vije difficulte ebars er familhou,
 Ar Person o arrange gant e vad curzuillon;
 En amzeriou a glemved, a chagrin, a vizer,
 E cavet soulajamant ebars er presbyter.

(386)

Amfin, an den Doue-ze, vel an autrou Lhostis,
 Person eus a Bloumilliau, den zantel a ilis,
 A laze e oll boneur da zoulach ar beorien,
 Pere en venere oll, vel tad d'ar gristenien.

Mes ar c'halomni infam, dign eus a Velzebuth,
 Gant e binim infernal a laza rein ar brud
 E zeo ar beleg santel, ar ventuzus Person,
 En deveus assassinat e vignon bras Redon.

Laget e zeo er prison, grêt e broces ractal,
 Ha condanet d'ar maro evel guir griminal:
 An oll a voa en glac'har, desesperet dre 'r vro.
 « Doue just! ra deuz ho prec'h d'en diffram d'ar maro! »

Interpellez da zisclêry hac en nevez devoa get
 Un dra benac d'observi var ar varn prononcet,
 An den just va[r] e galon a bos e zorn neuze,
 Hac en e za e lavar, o sellet ouz an êe:

(387)

« Doue just! Doue puissant! c'houi vel fouz va c'halon;
 ») C'houi voar ha me a verit va c'hondaonaton!
 ») Mes, mar deo ret din souffri un injust chatimant,
 ») Evel doc'h, Salver Jesus, me varvo innoçant.»

Daou-uguent devez goude voe ar chaffot savet
 Var blacen Clermont, evit ma vije dibennet;
 Un heur gent mervel e voe arretet eur muntier,
 Hac a anzao innoçant an autrou Person ger.

Ar barner a red leun c'hoerz var blacen vras Clermont,
 Pelec'h voa eur bobl immanç, carguet oll eus a spont;

Ar bourneo voa o prepar e instrument fatal,
Hac a yê da quemeret ar c'hêz Person ractal.

Barmerien an tribunal diouc'h-tu zo n'em gavet,
Ha procuror ar roue, var ar chaffot pignet,
Hac eno a vouez huel, ha gant solennité,
E prononç, leun a zaelou, ar c'horizon - mâ neuze :

(388) « Dirac Doue hac an dud, ni amâ a broclam
» E zeo an Autrou Person demeus ar c'hrim dirclam :
» Ordren a reomp ma vo gant an oll enoret
» Evel m'en deus meritet en amzer dremenet. »

Neuze prest en em rentjont en ilis cathedral,
En pini an Autrou Escop en em gavas ractal ;
An Te Deum solennel voe canet a galon
Vit delivranç evurus ar vertuzus Person.

Gergent neuze en em stlap var bennou e zaelou,
Dirac an tabernacl sacr, chommanç e vestri divin :
« O va Falver ! emezân, demeus a leir ho tron
» Recevit va zrugarez eus a greiz va c'halon. »

Distrei a eure ractal ouz an assistantet,
Ha gant eur vouez truerzus hac eur galon mantret :
« Huelit da betra e temn an infam calomni !
» Oh ! christenien, divoallit ouz eur c'hrim gen impi.

Mar tiquesse d'êc'h un deiz beza calomnié,
Na dleit en em venji diouz hoc'h enemiet
Nemet dre eur gundu vad ha hepret didamal ;
Se eo ar quella moyen enep d'an teodou fall.

(389) Na dleit get caout estranch e vec'h calomnié :
Piou eo, m'er goulen ouzoc'h, arichou na ve get ?
Se na dle get oc'h eston, christenien, vertuzus ;
Ar Juderien queachal n'espernjont get Jesus.

A. Lédan.